

Buez Mari - Amiz Picard,
 Ganet e Guiclan, baderzet en Guimilliau,
 hac entèret en ilis Cathedral Castel,
 Tost da auter an Itron Varia a Vouir-Sicour,
 Er bloa 1652.

(408, suite)

Var ton cantic Genovefa.

M'ho ped, speret a sclerijen,
 Da zont da gundui va fluen,
 Erit ma ellin recita
 Ur vuez demeus ar gaera.

Gerqent ec'h eure da Doue
 Ar voeu eus a virginite;
 Hac e ped ivez ar Verc'hez
 D'e zouten ar rest e buez.

(410)

Ar vuez - ma a zo treset
 Eus al levr a voa composet
 Gant Autrou La Marche e gallec,
 Erit ar bobl, en brezonec.

D'an oad eus a eiz vloas ractal,
 E servichas Christoph Abgral,
 Labourer honest, christen mad,
 A voa derzi evel un tad.

Mari - Amiz Picard zo bet
 Dre ar c'hraç a Jesus ganet
 Deiz ar Burification,
 En Guiclan, escopti Leon.

(409)

Dre ma voa yaouaf[?]ic meurbed,
 El leqjot da vessa 'l loened;
 Hed an deiz en em occupe
 Da bedi 'r Verc'hez ha Doue.

E zad, e mam, tud vertuzus,
 Guir servicherien da Jesus,
 E savas gant calz a furnez
 Epad ma voent en o buez.

Deus ar plas, m'oa gant e chatal,
 E tise vit an ordinal
 Vazzu Lampaul ha Commanna
 Guir-Sicour, Guimilliau peurruia,

Da vam Doue e voa antier
 Ha da sant Yan Brieler;
 Adalec e bugaleach
 Hi a rente dezgo hommach.

Erit gallout, vel plac'h fidel,
 Caout pers en oferen santel,
 Pa n' elle get realamant
 Beza es sacrific present.

Ne devoa c'hoas nemet seiz vloas,
 D'ar c'henta sermon a glêvas,
 Voa var su'et ar chastete,
 Hac a blijas calz d'e ene.

Ar scoier vad a roe bemde,
 Voa admiret bars er c'hontie;
 Mes pemp bloas goude 'voe galvet
 Da zicour e zad voa blesset.

(411)

Amiç, leun a compassion,
Ha carguet a zevotion,
A yas da Sant-Men prest tîmat,
Da c'houlen ar yec'hed d'e zad.

Gar e zad voa carzi breinet,
Er moment ma voa partiet;
Mes qerqent vel ma tistroas,
Ar gouli en em bareas.

O tistrei demeus a Sant-Men,
Hac e Montroulez oc'h antren,
E yas prest da Sant-Dominic
Da bedi e mestrez unig.

Ar manac'h Pêr Gintin neuze,
Oc'h anaout d'essenion Doue,
Ouz Amiç Picard a dostas,
Hac outi 'vellem a gomzas :

(412) — « Va merc'hic, ha c'houi gar Doue?
— Ja certen, dre c'hraç an êe...
— Deut da gôves en brezonec,
Pa na ouzoc'h ket ar gallec. »

— « Penos ec'h ouzoc'h-hu, va zad,
» Enj boa-me c'hoant ^{d'ej em} gôvessat? »
— « Va merc'h, dre ar c'hraç a Zoue
» E voan instruet eus a ze. »

E c'hôression achuet,
An tad derzi en deus roet
Gant laouenidiguez eur groas,
Ha neuze dei e lavaras :

— « Va merc'hic, mirit ar groas-se,
» Ha douguit-hi hed ho fue ;
» Un amzer vo e pehini
» Ec'h ello dont d'ho soulaji. »

Distrei eure d'ar quên neuze,

En eur drugarecat Doue,
Da verza bet covessat,
Hac e c'halon bœur soulajet.

(413) Eur pennad goude qement-mâ,
Ar manac'h voa o veacha,
Hac en em gavas hep retard
E ty Mari - Amiç Picard.

— « Va zad, eme Amiç derzân,
» Goal chagrinet en em gavan,
» Dre na zeus qet un tam bara ;
» Nemet souben n'eus en ty-mâ.

— « Gant joa me receo ho repas,
Eme an tad, goal gontant bras :
» Se a dosta qiell d'an c'halon,
» Rac ne meus nep pretantion. »

Tad Amiç Picard, clân neuze,
A c'hals d'e gasut e rugale :
« Va bugale, sonjit ato
» En Doue betec ar maro.

» M'ho pezo esperanç e Doue,
» Ho pezo graç demeus an êe.
» Me a ro dec'h a greiz calon
(414) » Bremâ va benediction.

» Va merc'h Amiç, c'houi ho pezo
» Calz a drubuilhou da receo ;
» Mes na gallit qet esperanç ;
» Doue zo bras e brovidanç.

» Eur c'hoant meurbet a zantân-me
» Da gasut eur ministr a Zoue :
» Amiç, galvit buan expres
» Da zont d'an noui, Dom Jacques. »

Amiç o verza distroet,
Goude berza avertisset,

72

Diouc'h-tu an Autrou Pouliquen
A errou da dal ar c'hristen.

« Va zad, dicourit oc'hanon
» Da vervel en christen quiron :
» Adieu, bed, emezan neuze ...
» In manus tuas Domine. »

ñmiç, p'oe e zad decedet,
Da zicour e mam zo ~~dommet~~
Betec an oad a drégont vloas, (415)
Hep ma en em glêmas biscoas.

Diffarant eur calz bugale,
Pere 'sel vel eur garg deze
Soigni o zud en o c'hosni,
Rac aoun dont da en em geni.

Eur vech hepigen e tizentas
Eur e mam, dei pa lavaras :
« Amiç qez ! tach da zemezi,
» Hac e po nebeutoc'h anui. »

« Bigen, va mam, na zemezan ;
» Ganeoc'h errou en em gavan ... »
E zud, o clêvet anezi,
A gommanças d'e goal-dreti.

Reco ra reprochoz piqant
Da garout buerz feneant ;
Anfin, n'e devoe nep repos,
Na nep douçter mui da c'hortos.

O va Doue mad ! emezi,
Hac e creder va accusi (416)
Da gabut aoun demeus ar poanmiou,
Ha da grena diouc'h trubuilhou !

Guerc'hez santel ! ô va Mam guer !
C'houi, sant Yan an Arieles,
Ha dreist oll, ô Salver Jesus !

Teulit varnon eur zell truezus.

Ar peiz e devoa e c'hrenvet
E voa bet e zad o clêvet
O lavarad d'e mam un de
Laqat esperanç en Doue.

Biscoas Amiç bars en dançon,
Na gennebuit en novezion
Na vije gûelet o qerzet,
Nac o vont etouez ar bauthret.

O tout gant ar procession
A Lambader, gant feiz quiron,
Gant un autrou voe arrêtet,
Hac offrou infam dezi grêt.

Amiç a recours da Zoue (417)
Ha d'ar Verc'hez santel ive,
Da Sant Yan an Arieles
D'e delirra eus a valer.

A doliou bas e voe scoët,
Ha gant eur vistolen tennet ;
Mes ar monstr a ze a voe voas,
Rac ebars e zorn e crevas.

An den fall a voe prisonniet,
Hac e Montroulez condaonet ;
Mes e Roazon e voe barnet,
D'ar galeou evit bepret.

Amiç zo bet var e gûele
Er spaç eus a zaou vis goude,
Gant suit eus ar goal drêtamant
En doa grêt dei an den mechant.

En c'hoerzec cant nao ha trégont,
E doa sonjou leun eus a spont :
Ar purgator hac an ifern
A vele, ha corfou en bern. (418)

Escop Jerne, Rene Louet,
En deveus bet certifié,
Penaus epad hed trivac'h vloas
Amiç a voe vertuzus bras.

Gant calz demeus a jesuité
E zoa bet Amiç bidité
Ha memes gant Tad Dissec
Covessour da Louis Trizec.

Hac oll ec'h assurjont neuze
E zoa leun a speret Doue,
Hac e zoa carquet a vertus,
Hac ivez güir verc'h da Jesus.

Murbet e voe persecutet
Gant tud mechant, na glasqent get
Bemdez da implija nep ard
Vit coll Mari - Amiç Picard.

(419) Daoust d'an oll bersecution,
Bepret ferm er religion,
Amiç na oppose netra
Nemet vertuziou ar gaera.

Admiret en e discoursiou,
Coulz vel en e oll demarchou,
Ar simpldet demeus e c'halon
A zisqueuze e voa güirion.

Certen e zoat bet assuret
E devoa bepret cunduet
Eur vuez ar vertuzussa
A ouffet cavet er bed-mâ.

Souffret e deveus calz certen,
Deus a bers e adversourien;
Ha james na barisse trist
Dre ma souffre vit Jesus-Christ.

Paperou zo bet imprimet

Dre urz, Esqeb ha vigelet,
Da attesté ar virione
Eus a guement a zigüeze.

(420) An Autrou Yoen a Boulprie,
Autrou Drebodennic, pini
Ariogan, den a feizon,
A Guimimidilly e Leon.

Oll e zint bet test a viscoas
Penaus, er spaç a drivac'h vloas,
Amiç Picard na ellas get
Anduri nep bevanç ebet.

Neb bevanç na elle qemer,
Nemet sacramant an Auter,
A receive cazi bep sizun,
Ha peurvuia e voa d'al lun.

Arrount a ra en Castel,
E felec'h voa un demezel,
Janned Mancel e voa hanvet,
A yê alies d'e quelet.

E zad a fellie 'demezi
D'un digentil a Normandi;
Consulti ras Amiç var ze,
Hac ec'h heuillas urzou Doue.

(421) Lavaret eure d'an itron:
« Me a lavar deoc'h gant güirion,
» Penos e clefot comz ouzin,
» Hac em bezo poan ha chagrin.

» Mes var ze m'ho ped da devel,
» Rac vit Jesus ma c'houl mervel;
» Ha rac-se, neus fors petra ve,
» Bezet grêt bolonte Doue.»

Amiç a voe placet soudan
E ty 'n demezel Lenoudren,

74

El lec'h m'oa pañsionnerezet,
Hac a voa ganti estonet.

An Autrou Guillou a laza
Ur plac'h hanvet Gabriela,
Ha ganti Janned Roquinard
Evit soigni Amiç Picard.

Janned voa ur fals-devodez,
Ha na glasqe peur-alies
Ha dre e jestou, dre e ard,
Nemet noaz da Amiç Picard. (422)

Gabriela a voe ive
Ur pennic scans ha didalve,
A vije bepret er festou,
Hac a rede d'an nosverziou.

Amiç o c'houzout an draze,
A lavaras dezi neuze:
Mar c'untinuit evelse, c'hoas,
M'el lavaro d'ar Vigel-vras.

Gabriela a voe neuze
Offanset-eus ar gourdrous-se,
Hac a respontas da Amiç
Gant eur galon leun a valis:

—« Mar teu did comz a enep din,
» Me rayo did assur chagrin;
» Rac me a doño da james
» N'out nemet un hypocrites. »

Gabriela a yas en cus
Tre da gaout eur religius,
Hac a ras rapportjou euzus
Enep Amiç, merc'h da Jesus. (423)

Persecutet voe adare
Guir servicherez mad Doue;
Chasseet voe ermès an tj

Ar plac'h gen devot da Vari!

Autrou Poulpri neuze ractel,
Arrogan ar gathedral,
O c'houzout stat trist merc'h ar groas,
A voe meurbet glac'haret bras.

Robert Cupif neuze hanvet
Escop Leon, ha consacret,
A scrifas d'an autrou Louet
D'ober qén vije arruet.

Arruet er guet a Gastel,
E vel Amiç hez dale pell,
Hac e voe contant bras neuze
Eus a servicherez Doue.

En c'hoezec daou hac anter-cant
E voe ar fin eus e zourmant. (424)
Doue en e rentas gouiec
E varvije da zeiz Nedelec.

An Autrou Escop e novas,
Ha gant soign vras e c'honsolas:
« Va merc'h, esperit en Doue;
» Digor ezeo dec'h dor an ee. »

Zeiz Nedelec, vel ma vouie,
O rancout renta e ene,
En em lazas var e daoulin
Vit implori e Mestr Divin.

Neuze n'em brepar da vervel;
An oll zent a deu da c'hervel,
Hac e varv en eur bronenci
Hanoyou saer Jesus, Mari.

E bisach voe disolbet,
Ha d'an oll eno exposet:
Ha deiz ar gouel a Sant Stephan
Voe enteriet incontinan.

(425) Ebars en ilis cathedral
 E ma e bez cazi ractal
 D'auteur Gouin - Sicour beniquet:
 Bizitet eo gant peb respet.

Guiclanis ha Guimilliauis,
 E'houi dle caout sonch eus a Amic,
 Dre ma zoa demeus ho contre
 Ar serricheres - se da Zoue.

Ha c'houi, etrezoc'h, Castellis,
 A bossed ebars hoc'h ilis
 Ar verc'h eurus - se da Jesus,
 Imitat - hi en e vertus.

Pobl antier demeus a Leon,
 Tud ferm en ho religion,
 Bezit, m'ho ped, en ho speret
 Sonch en Amic Picard bepret.

fin. A. Lédan.

(Vol. VI, p. 408-425.)
 82 str. numérotées.